

Niv. 51

15 ebrel - 15 mae 1974

« POBL VREIZ »

B. P. 304

29273 BREST CEDEX

KOUMANANTOU

Boutin : 6 L

Skoazell : adaleg 15 L

K.R.P. 2746-79 ROAZON

POBL VREIZ

0,50

PENNAD-STUR

Troet fall eo an traoù ! Sac'het omp en un enkadenn spontus !

Bemdez ne vez keloù nemet eus se. Diskanañ 'ra hon aotrounez, kweda ! Diskaret eo o c'hlipenn d'ar re a gane meuleudi d'ar gapitalouriezh (kapitalism).

Hag emañ al lur gall war-neuñ : en gwirionez emañ o vont d'ar strad : 5 % en deus kollet abaoe. Da heul, e tiskenn priz ar marc'hadourezhioù kaset d'an estrenvro (pe : e-z-porzhiat) ha gant-se ec'h eo aezetoc'h e-z-porzhiat. Met, siwazh, ne c'hello ket Breizh tennañ he mad eus se, peogwir ne e-z-porzhiomp kazi mann ebet. Hogen, er c'hontrol keroc'h vo an traoù degaset eus an estrenvro, ar marc'hadourezhioù enporzhiet. Gwazh a-se 'vat, evit ekonomiezh Breizh, evit hon uzinioù bihan, hon micherourion, hon artizanted hag hon labourerion-douar !

Start eo an traoù er bed a-bezh, ha startoc'h evel just evit an dud paour, evit ar broioù bihan. Diaezet eo an uzinioù en hon bro, darn anezhe a vez serret zoken (*Trigano, Noë, Le Goëland*, hag all).

Hag ouzhpenn, ur bern gwalldaolioù a gouezh war ar vro : gant ar wallamzer n'eo ket bet gouest ar besketaerion da vont er-maez er goañv-mañ. Ha kouezhet 'zo ur c'hleñved dic'hortoz ha dianav war an istr e Lenn-vor Brest. Ha rivinet eo kenwerzhourion (konversanted) Montroulez, Kemper, hag all, gant an dour-beuz. Ha rivinet labourerion-douar Breizh-Uhel gant an derzhienn aftek war ar chatal. Evuruzamant 'zo diwanet kengred (solidarité) etre ar Vretoned hag en em sikour kenetreze pa zegouezh ur gwall-eur bennak. Ha gwell a-se evidomp, rak tud an Ekzagon ne seblantont ket bezañ gwall-chalet gant hon gwalenoù.

Perak kement-se a genskoazell hirie an deiz e-touesk ar Vretoned ? Peogwir e santont muioc'h-mui ec'h eo dibarel pe divoutin o stad, o diaezamantoù, ac'hane o stourm.

Pa zo bec'h er «*Joint Français*» pe en ti Doux en Pederneg, e vez gwelet labourerion Breizh a-bezh oc'h en em stardañ en-dro d'ar c'hrevisted. Ha grevisted ti-moulañ ar «*Goëland*» o sikour o c'hamaraded eus Pederneg. Ha pa vez distanet an traoù en Pederneg, bec'h adarre en Sant-Nazer, ha fest noz evit dic'hopridi Trigano.

Deuet eo al labourerion vreton da gompren int dreist-korvoet (surexploités), peogwir int trevadennet (kolonizet). Hag aezet a-walc'h eo gwelout an dreistkorvoadur trevadennel-se : Tud Pederneg a'n em ganne evit 105 000 lur kozh ar miz, pa vez tud Saviem en Caen o stourm evit kaout ouzhpenn 165 000. Pell 'zo emañ U.D.B. o sevel klemm a-enep seurt dreistkorvoadur, met tud 'zo n'o deus ket komprenet mat c'hoazh.

Ya, dibarel eo stourm labourerion Breizh. Ar Gwenn-ha-Du hag ar banniel ruz n'int ket arouezioù (simboloù) enebet,

Pennad kaoz :


«N'eo ket gant plijadur am eus

LEUSKET MA DOUAROU!

(Gwelout p.4)

AR BREZHONEG O VONT WAR-RAOK

Muioc'h-mui a vrezhoneg a c'heller gwelout bremañ un tamm-ig e pep lec'h. Implijet e vez ar brezhoneg er bruderezh (*publisme*), e-barzh ar stalioù, hag all... Nevez'zo, en ospital Brest ez eus bet gwelet panelloù divyezhek e-lec'h ma na oa met galleg a-raok (hon foto aman dindan). Ha kaoc'h gant Sanguin etti !



an div arouez int eus ur bobl trevadennet o tihuniñ.

Pebezh enor evit tud U.D.B. bezañ bet ar re gentañ o tis-kouez hent an di-drevadenniñ da labourerion hon bro. Hir eo an hent-se, met dere'hel a refomp start gantañ betek ar penn !

Bevet Breizh al labourerion !

UDB

«N'EO KET GANT PLIJADUR AM EUS LEUSKET MA DOUAROÙ!

Lennerien *Pobl Vreiz* a oa sur-awalh e vez lamet digand peizanted 'zo Tammou d'ouar (d'ouar mad peurluva), evid ezomoun an industri hag an aradokad. Graet eo bet kemeret-se e bro Leon, kalzig : e Lann-Vihan, evid sevel ar rafineriezig da skwer, pe er

P.V. Bez e hellit rei da houzoud da lennerien Pobl Vreiz e peleh emma Plouedern ?
X. Plouedern a zo etre Landerne ha Plouzeniel (Gwintevint) ha ma a zo o chom e Kerolland, war vord an hent nasonal 170, war vord an otorout nevez ivez, an hini a zo bet digoret n'eus ket gwall bell 'zo etre Brest ha Landerne. Emaon, dres, o chom harp da echeherer pe rechangeurs Sant-Alar.
P.V. Ha perak eo bet tennet ho touaroù digand-eh ?
X. Silet, evid ober ur ezane industrielle. Koulskoude, an douaroù a zo bet adloandennet er bloaveziou 1969-1970. Va douaroù neuze a oa e-kichen an daou hent braz, ar peza a oa eur plas mad, brao mond dezañ abalamour d'an daou hent-se.
P.V. Douast hag ez bet tennet kuit diganezh touad ho touaroù ?
X. N'int ket. Met daou ha tregont devez-arat 'zo bet graet memestra, ha ne chom ganin bremañ nemet c'hwec'h devez-arat. A zo gwaoh 'ar remañ en em gav bremañ e diabarz Z.A.C. Plouzeniel, setu, a-benn ar fin, ne chom ganin netra ken.
P.V. Petra rezh goude-ze, neuze ?
X. Ouzijet vin da drouz-furm ar c'hreier, rak bremañ, en em lakañ d'ober m'oh ; m'oh a heiler sevel hap kaoud douar.
P.V. Ha bez emañ holl-unan evel-se, pe tud all a zo ivez hag a zo bet tennet douar digant ?
X. Bete-hen emañ pevar. Eun amezeg a zo bet tennet digantañ war-dro ugent devez-arat bremañ.
P.V. Hag an daou all ?
X. Nebeut-ha zoar : a zo bet tennet diganto — med diaosoh e vo dezo kas o ziegze-er-dro, evel



Gazeg-Wenn, evid sevel tiez neuze... Hag ivez war berrze Plouedern, evid azoa stalioù-labour... Setu ez omp aet da weled unan eus labourerien douar ar gumun-se bet tennet evel-se douaroù digantañ.

dre ma kave dezo e oam tud oset, ha n'om nemed re yaouank.
P.V. Evid ober petra o deus kemeret an tachennoù-douar ?
X. Evid sevel warno stalioù-labour. Thébault (simant hag all) ha Gwintevint (sté Galvepor).
P.V. Euz a beleh e teue Thébault ha Galvepor 'h ?
X. Euz Landerne.
P.V. N'emaint ket brezhoc'h du-hont ?
X. No deus ket plas awalh.
P.V. Diou stal o devo neuze, unan e Landerne, hag unan amañ.
X. Nann. Sur-awalh e wellint ker o chantier e k'ar, ha d'am soñh e hellint kreski o stal, hag e chomo ganto eur gachenn vad a arhant, peogwir e prenent mathad-mad amañ.
X.
P.V. Ne vez ket paet mad ho touar dech ?
X. Daou hant lur koz ar metrad-karrez, setu ma renkfen grena eun tiege all gand an dra-se ne vije ket posubl. Hag ouzpen, evid tenna ar mathad diganeho, e oa bet prometet diom douaroù ken braz e gumun. Hag a-benn ar fin, ne oa netra ken.
P.V. Ha penaos eo echu an afer ?
X. Sinet on-eus, kentoh eged ober eur prosez, peogwir e ouim o daa kollet o him tud Kerber (frachenn ar Gazeg-Wenn) hag edont kalz niverus-holl eged amañ. Ma vefe bet tennet an douaroù diganeho dre an ekpropriasion (pe an di-berhena, e vefent bet paet kalz izeloh choaz, med n'eo ket gant plijadur am eus leusket ma douaroù da vond kuit diouzinn...

Komzoù dastumet gand P. ar Braz ha F. Morvanou.

Setu penaos e vez tennet digand peizanted 'zo, o douaroù hag a zo, e gwirionez, o hiniou-douar. Ar peizant n'e-neus galloud ebet da herzel ouz douaroù divalo ar pennoù braz : ar re-mañ na houlennont ket all digand penhenn an douaroù. Ar peizant a zo e-unan, lezet a-gostez, ne vez ket taolet evez outañ. Ar peza gont evid mevelien ar gaptalouriezh (kapitalism) eo ober o reuz, astenn lezenn dir ar c'haptal gant asant ha skoazell pennoù-braz ar vro. Ne vez


ket klasket diazezan an tachennoù-labour war an douaroù an treuta, ar re vad a vez kemeret, ma vezont plasat mad. Red e vo cheñch penn d'ar vaz aze ivez : ar peizant a zo aet skuz, pise-skuz, o weled e vez brezet evel-se. Al labourier-douar a fell dezo kaoud an droed, kaoud ar gwir, da zesida, int ivez, diwar-benn peza a sell ouz o micher hag ouz an impijer graet eus douaroù ar vro.

KOUMANANTIT DA
POEVL VREIZH
REVOLUTIONAIRE BRETONNE, 1962
ANV ANV-BADEZ CHOMLECH
a gas e goumanant boutin : 6 F (1) skocazell : adalek 15 F (1)
Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1) mandat-lizher (1) chekenn-bank (1)
Diversit ar gerioù na servijont ket.
K.R.P. ROAZHON 2 746 - 79

KOUMANANTIT DA
LE PEUPLE BRETON
JOURNAL DE L'UNION DEMOCRATIQUE BRETONNE
ANV ANV-BADEZ CHOMLECH
a gas e goumanant boutin : 12 F (1) skocazell : 20 F (1) estrenvro : 20 F (1)
Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1) mandat-lizher (1) chekenn-bank (1)
Diversit ar gerioù na servijont ket.
K.R.P. ROAZHON 2 365-76

« BUOCH - BREZEL »
(GOVERN EKSTRA KROUET GANT MINISTRA NEVEZ AL LABOUR - DOUAR.)
E KEVELLA - F. KERAN.

AR BONEDOU RUZ



Goude-se e tegasont pivuz a-forc'hiadod dirak ar maner, evit c'hoarzhian an tan e-barzh. Ha pa wel ur vogelfeul deo o sevel, e stag ar «Mogn brass da laer» - Ra gwezio an doem war leurenn an ti. Ne zle netra chom a-sav. Ha bremañ, doemp kuit ac'han...



Dirak kemeret a vez ur c'hoarvezout, e hast huan an d'eg de Chaulzezh zeh e zientezzoù. Lakaat a ra ar markiz de Nevel e plas ar markiz de la Coste a zo gloazet. Dont a ra e-unan an zoken d'an Henbont, d'an 9 a viz gouere 1975.



Met kenderc'hel a ra an stalioù e bro-Gernev, hag e teu al luskad da vezañ dipac'heloc'h-dipac'heloh. D'an 13 a viz gouere, ez eo sachet un denjeññl er-mez eus un iliz war-bouez e vlev. Ha tavaet gantañ led ar varzh, ez eo skoet en un doufezh, hanter-vaz.



Dek devedh goude e tago un denjeññl all, en e gartell a Gombid. Ha graet dezhan e stal. Hag aloubet kastell de la Motte, etal Douaramez, e-lec'h ma lazher ar gward.

A-HED AR BLAÑVOUEZH

E-pad vakañsoù Nedeleg, hon eus karzhet a hed kanol Naoned-Brest, eus Roc'h an da Valastreg. Ar wech-mañ, hor boa lakaet en hor soñh mont war hor vilioù a-hed ar Blañvouezh, eus an Henbont da Vur. Pa vezer e Breizh, e c'heller tennañ e vad diouz an amzer na re yen na re dom. An dud ne reont ket « Siwazh ! Bez, ez eus ur bern traoù hag a c'halleb bout graet gant ar Viorstred, hervez skouer pobloù turoc'h, Swiad ha Norvejz e-mesk ar re-all.

Antronoz e kempenn : bez' e teouont eus tachennoù industriale Ponds. Tammou plastik a-hed ur stêr ken brav ! Bout alioù plastik war an odoù. Koadoù diskaret evit ober kazantennoù a zo lasket, pe kaset d'an douarier ! Forañ ha kouzhañ, setu lezenn ar gaptalouriezh. War-dro c'hwec'h eur, e tizhomp Pont-Angan, ur gleradennig koant etre Baod ha Kistinid. Silet e vez ouzpen un tammig a-dreuz ; mont da bourenn war sarch-kouarn e miz neuzeh, ha tud un tammig war an oad ouzpen ! Orietaled a vez er bed evelkent ! An dra war-lec'h emañ eo Pondi, goude bout gwelc'hamm-droer ar Blañvouezh e Kattenege, lec'h ma savas sant Blic'hwi e benti brudet, e-harz ur roc'h. Pelloc'h, lakaet eo bet un doenn nevez war chapel ar udiar e Gohaz, met an doer, a zo distret hag ar trowezh a gresk hag a gap ouz ar moreruz.

An tren en deus hor c'haset betek an Henbont gant hor micher-houarn. Glabroek eo an amzer ha gwisket hon eus hor «K ways» ken skañv ha kenspleus. Pemamp o treuzh ar pont Janec-Flamm, setu ur bare plac'hed yaouank o c'hoarzhin e-vegad d'ouar hor c'houat, unan zoken disvevlec'h eget ar re-all.

War-dro c'hwec'h eur, e tizhomp Pont-Angan, ur gleradennig koant etre Baod ha Kistinid. Silet e vez ouzpen un tammig a-dreuz ; mont da bourenn war sarch-kouarn e miz neuzeh, ha tud un tammig war an oad ouzpen ! Orietaled a vez er bed evelkent ! An dra war-lec'h emañ eo Pondi, goude bout gwelc'hamm-droer ar Blañvouezh e Kattenege, lec'h ma savas sant Blic'hwi e benti brudet, e-harz ur roc'h. Pelloc'h, lakaet eo bet un doenn nevez war chapel ar udiar e Gohaz, met an doer, a zo distret hag ar trowezh a gresk hag a gap ouz ar moreruz.

Komzet e vez eus ar «rasism». Gwir eo. Bout a zo gouarnerezh e-keñver an Arabed hag ar re zo. An holl a oar. Bout a zo «rasism» ivez eus perzh ar re gozh e-keñver ar re yaouank. N'eo ket ken anat. Met ne vez ket komzet eus gouarnerezh ar re yaouank e-keñver ar re gozh 'h. Bout gwisket evel ma karomp ? N'ien eus ket an droed ! Ha gwa d'an hini yaouank a vev peza a bily dezhañ (e dezh) : goperezh ha kunijennou evit !

Breizh socialist ne c'hell ket dilezel er mod-se hor primidigzhou. Silet e vo war un dro izidion deneloc'h, ha vevet hor mennestoù, kozh, frouezh jin, labour ha karantez hor pobl. Etre Pondi ha Mur, ar stêr a vez strisoc'h. E tal Sant-Aignan, e toullan kaoz gant ur choer o kardellat.

« Ar rasism » Arabat dit bout dishevel diouzpen ! Kemeromp hent-ar-ganol. Abenn ur c'hard-er-vez erroump e Lokrist ! Pebaz arvest tuezuz ! Lec'h ma oa gwechall tuezuz, kanou, mallozhioù, labour, buhez en ur ger, n'ous mu netra. Pe tra zo marv. An izidion an em lede war-hed ur c'hilionter. Ul lod a zo bet dismanet, met ar siminal divoget a chom atav en e sav, ha n'eo ket bet c'hoazh diverket e *Les forges d'Hennebont* a war an douarezh.

« Ar rasism » Arabat dit bout dishevel diouzpen ! Kemeromp hent-ar-ganol. Abenn ur c'hard-er-vez erroump e Lokrist ! Pebaz arvest tuezuz ! Lec'h ma oa gwechall tuezuz, kanou, mallozhioù, labour, buhez en ur ger, n'ous mu netra. Pe tra zo marv. An izidion an em lede war-hed ur c'hilionter. Ul lod a zo bet dismanet, met ar siminal divoget a chom atav en e sav, ha n'eo ket bet c'hoazh diverket e *Les forges d'Hennebont* a war an douarezh.

Treuzt Lokrist, setu ni e-kreiz ar maeziou. Trouz ebet nemet kan al labouradegoù hag, a vare da vare, nij ponner ur yar-dour a ya da gubhat war ar rib all. Ahebet eo bet an hent-kanol gant dic'hinn miz gever : ret eo diwall ha, meur a wech, mont war-droed. Pezulz e vo reparaet ?


Treuzt Lokrist, setu ni e-kreiz ar maeziou. Trouz ebet nemet kan al labouradegoù hag, a vare da vare, nij ponner ur yar-dour a ya da gubhat war ar rib all. Ahebet eo bet an hent-kanol gant dic'hinn miz gever : ret eo diwall ha, meur a wech, mont war-droed. Pezulz e vo reparaet ?

Moarvat na vo ket. Da betra, da biv e servij kanol Naoned-Brest bremañ ? War an tu all eus ar stêr, lec'h ma kresk ar gwez, e-lec'h a daimmoù plastik a zo chomet a-ispilh ouz ar branou.

Moarvat na vo ket. Da betra, da biv e servij kanol Naoned-Brest bremañ ? War an tu all eus ar stêr, lec'h ma kresk ar gwez, e-lec'h a daimmoù plastik a zo chomet a-ispilh ouz ar branou.

Na lous da welet !


Na lous da welet !



FRANKOFONI
PAOUEZ DA QUELAN, GENAOUEG,
LAKAET VO BIT UN TEOD GALLEG !

BREIZH N'EMAN KET DA WERZHAÑ

MA TEBRIT LEGUMAJ EUS HO LIORZH...




MA EVIT CHISTR GRAET GANEODH E-LECH EVAN GWIN RU...



MA LENNIT "POBL VREIZH" E-LECH LENN "LA NATION"...



MA SELAOUIT PLADENNOÙ E-LECH SELLOUT OUZH AN TELE...



MA GAV DEODH EO AES-TRE RASTELLAT ARCHANT DIWAR GOUST AN DICHOUGERIEÑ YER...



MA SC'NJ DEODH EO KEN MAT MARCELLIN E PENN AL "LABOUR-DOUAR" 'VIT E PENN AN "DIABARZH"...



NEUZE OCH UN ENEBOUR DIABARZH

(E YEZH FLOUR AR GOVERNAMANT : "ENNEHI INTERIEUR")

... HA NEUZE E TEUIO PRESTIK AR FLIKED D'OBER WAR HO TRO !



HAG EVO KAVET L'R PLAS EVIDOCH ER STAD !
TOSTAAT A RA ANZER AR PINOCHET-ED !

1974